

KEAV - 2023



KELEIER KEAV : UR SIZHUNVEZH EVIT OBER ANAOUDEGEZH GANT BED AR RADIO

Labourat a raimp a-hed ar sizhun evit ober anaoudegezh gant bed ar radio.

Oberiant e vo ar stajidi. **Pal ar staj a vo fardañ un abadenn bemdeziek, Keleier KEAV, danvez radio liesseurt enni** (kronikennoù, atersadennoù, reportajoù, faltazioù radio hervez c'hoantoù ar stajidi). Skignet e vo an abadenn war ar c'hamp bemnoz. Da heul ar staj e vo lakaet an abadennoù e podcast war lec'hienn Radio Kerne.

Un devezh labour er radio a vo e-kerzh ar sizhun (gweladenniñ Radio Kerne + Labourat en studioioù)

- Tañva teknikoù ar radio :

Komz ouzh ar mikro, prientiñ ha kas un atersadenn da benn, skeudenniñ ur reportaj gant ar son, sevel kronikoù, sevel blenier un abadenn.

- Ober anaoudegezh gant ar binviji teknik :

Implij ur son-enroller, meziantoù frammañ.

Ne vo ket kemeret ouzhpenn 10 den er rummad-se. Gwelloc'h eo d'ar stajidi bezañ en o aes gant an urzhiataerioù.



	LUN	MEURZH DEVEZH ER RADIO	MERC'HER	YAOU	GWENER
MINTIN	<p>Kinnig ar radio, program ar sizhun</p> <p>Dibab danvez radio : atersadennoù, kronikennoù</p> <p>Sevel bleiner an abadenn</p>	<p>Gweladenn ar radio</p> <p>Kejadenn gant labourerien-ezed ar radio</p>	<p>War an dachenn : Mont da atersiñ tud ar c'hamp Reportajiñ</p> <p>Skrivañ kronikennoù</p>	<p>War an dachenn : Mont da atersiñ tud ar c'hamp Reportajiñ</p> <p>Skrivañ kronikennoù</p>	<p>Prientiñ abadenn fin ar staj</p> <p>Skrivañ an abadenn</p>
GOUDE-MERENN	<p>Deskiñ implijout binviji enrollañ</p> <p>Stummadur war ar skritur radio</p> <p>War an dachenn : Mont da atersiñ tud ar c'hamp</p>	<p>Frammañ ar pennadoù-komz</p> <p>Skrivañ an abadenn</p> <p>Enrollañ "Keleier KEAV"</p>	<p>Frammañ ar pennadoù-komz</p> <p>Skrivañ an abadenn</p> <p>Enrollañ "Keleier KEAV"</p>	<p>Frammañ ar pennadoù-komz</p> <p>Skrivañ an abadenn</p> <p>Enrollañ "Keleier KEAV"</p>	<p>Frammañ ar pennadoù-komz</p> <p>Enrollañ abadenn fin ar staj</p>
DIOUZH NOZ		Selaou an disoc'h	Selaou an disoc'h	Selaou an disoc'h	Selaou an disoc'h